

KOUSKET EVEL... UR BROC'H !

DAOU VROC'H SOUEZHET BRAS
O WELET UNAN BENNAK O
TENNAÑ UR POLTRED OUTO !

A-wechoù e vez hegazet al labourerien-douar gant ar broc'hed peogwir e tistrujont ul lodenn eus o flant. Gwir eo e tebront muioc'h a blant eget loened all eus ar memes familh. Maiz a ya ganto pa ne gavont ket traoù all da lakaat en o c'hof. Met ne zistrujont ket ar plant all a vez hadet gant mab-den. Kavout a reont gwelloc'h lonkañ loenedigoù zo hag a zegas kudennoù deomp : buzug, krignerien, preñved... Heureuchined a zebront ivez, o enebour brasañ eo broc'hed !

Toullañ a ra ar broc'hed bertimoù da chom dindan an douar, evel ar gozed. Skilfoù kreñv o deus ha gouest int da skrabañ douaroù kalet-mat. A-wechoù e vez meur a doull da vont en ur vertim, betek 30 pe 40 anezho d'ar muiañ. Disheñvel mat e c'hell a vent bezañ eus ur bertim d'unan all : etre 10m² ha 1000m². En diabarzh e kaver seurtoù kambreier el lec'h ma chom ar broc'hed da gousket e-pad an deiz ha privezioù ivez !



SETU ROUD PAV UR BROC'H.
SKILFOÙ KREÑV EN DEUS EVIT
GELLOUT TOULLAÑ AN DOUAR
KALET.

Pa vez erru an noz e ya Mamm Broc'h da chaseal. Chom a ra ar re vihan da c'hoari dirak «toull an nor», prest da redek en diabarzh ma'z eus dañjer pe zañjer. Plijout a ra dezho c'hoari bezañ bras, evel ma ra ar vugale ! Pa teu ar broc'hed bihan maez eus kof o mamm ne welont na ne glevont netra. Moal int zoken ! Tamm-ha-tamm e teuio dezho ar c'hleved, ar gweled... hag ar blev ! Rankout a ra Mamm broc'h degas an neiz peadra da dommañ he re vihan (delioù hag all) peogwir n'eo ket gouest o c'horf d'en ober e-unan c'hoazh.

E-kerzh ar goañv e kousk muioc'h ar broc'h eget ma ra peurvuañ. Setu perak e lavarer e brezhoneg «kousket evel ur broc'h» pe c'hoazh «roc'hal evel ur broc'h» !

Diwar-benn unan bennak fuloret e c'heller lavaret ivez eo «savet broc'h ennañ (pe enni)».

Diaes eo bet ar bloavezhioù 1970 evito. War zigarez stourm a-enep ar gounnar, ur c'hleñved deuet deomp gant al lern, e veze lakaet gaz ekement toull kavet er c'hoadeier pe war ar maez, evit lazhañ anezho. Toull ul louarn pe toull ur broc'h e oa hennezh ? Ne glaskent ket ober an diforc'h. Ur bern broc'hed zo marvet evel-se. Hiziv c'hoazh e tigresk an niver anezho. N'eo ket difennet o chaseal ha war an hentoù e vezont gloazet pe lazhet ivez.



A-WECHOÙ E VEZ MEUR A DOULL
DA VONT EN UR VERTIM. HA
GWELET A REZ ANEZH ?



LOUT' A VEZ GRAET
EUS AR BROCH IVEZ
A-WECHOÙ. SETU
NEUZE UR GËRIADENN
EUS SPEIED (29) A
VEZE KAVET BROC'HED
ENNI GWECHALL GOZH
MOARVAT.

UR GEYREDIGEZH ANVET «GMB» A RA WAR-DRO AR BRONNEGED HAG A ZO O
KLASK GOUZOUT PEGEN NIVERUS EO AR BROC'HED (HAG AR BRONNEGED ALL
IVEZ) E BREIZH. MA WELEZ UNAN, BEV PE MARY, E C'HELLEZ REIÑ SIKOUR DA
SEVEL ATLAS BRONNEGED BREIZH (AES EO !), WAR O LEC'HIENN :

<http://gmb.asso.fr/click2map/index.php?page=index>

TITOUROÙ ALL DIWAR-BENN AN ATLAS-MAÑ :

<http://www.gmb.asso.fr/Atlas4.html>



PA VEZ ERRU AN NOZ E YA TAD
HA MAMM BROC'H DA CHASEAL...